

CHANSON AN TRIVEC'H PLANEDEN

11.232

Var ton Cloarec Pempoul.

M'AM be un tam amzer, pluen, liou ha paper,
Squient evit merqa, var beun nebeut amzer
Me rafe or reglen var ar goal blanedan
Demeus ar c'haëra fleur en em da drezen.

Qent avanç davantach, e reuân da c'houlen
Sclérijen ha graçou an trivec'h planeden,
Pere a c'houarn tout oll izili an den,
Eos a guement a ra hac a ell de gompren.

Artez eo ar guenta eos ar blanedennou.
Outi dre breferanç e c'houennan graçou :
Rac hep caouet be graçou ne ouffet qet compren ;
Pa zeo hi a c'houarn ar speret hac ar pen.

Pa deu din da sonjal em amzer dremenet,
Ha laqat va memor en hini da zonet,
Va c'halon a lar din, mantrat gant ar glac'harc,
Birviqen va repos n'em be var an douar.

Bremàn me ziscléryo ebars en abrege
Va flanedan galet tremenet em bue,
Evit an effeou sur na recitin qet.
Va c'halon, pa sonjân, a zo c'izi rannet.

Abaoue ar moment ma zè bet unoisset
Va ene gant va c'horf, e voa predestinet
Gant Doue pen da ben ar soit va flanedan,
Va brassa plijadur a raje din angen.

Abaoue m'on er bed mā, me a ell lavaret
Qement seurt plijadur zo ganèn érouet,
A zo bet miserabl ar fin eos anez,
A scôde em c'halon evel lanc pe gleza.

Me mens bet an amzer, ia, n'en eos qet pell.
Ma velen er jardin fleuriou ever o sevel,
Erfio, me zo trumpet em oll bretantion,
Ne meus nemet piqou da biqa va c'halon.

Ar c'huezec a vis here eo tremenet ar bla
E rencontris un den pa voan o studia,
Pehini am pedas da vont d'en assista
Betec ur plac citet vit va santifia.

Pa voamp éru er plac piñi vos assinet,
U/ femelen yaouanq en deus va decevet,
Hac a rentas eno va c'halon languissant
Gant e sellou mignon bac e c'houzou charmant.

Va saludi eure gant guir homilite :
Piou oc'h-u den yaouanq, hac eos a be contre ?
Ha me respout dezi ebars en ear guer bér :
A nep ea deus dessign da vont ha servicher.

Excusit, den yaouanq, eos ar vadelez se,
Ruc ne veritan qet caouet an enor-se ;
Mes pa rit din an enor d'er beza annoncet,
Bezet grét em andret evel a leveret.

Azait, plac'h yaouanq, ceto'r scabel aze,
Vit ma clévin ganèch un darn eos ho toare ;
Me garfe, plac'h yaouanq, e larfac'h din brémàn
Ha me a zo d'ho erad, evel m'en deziran.

Eleaf, den yaouanq, me a ell lavaret,
Abaoue ar moment ma meus bet ho quelet,
E zoc'h sur an objet herves va fantazi,
Ne zoziñan netra nemet vec'h fidel din.

Asça ta, plac'h yaouanq, me a guemer conge,
Eus ho pedi da chom bars er santimant-se.
Bet evidon amitie, evel ma zeo dleet,
Ha m'ho caro ive gant enor ha respet.

Bet persuadet mat eo guir va freposiou,
Na credit qet-an d'od gant o goal deodadou ;
Hac evit prouvi déc'h en ho caran parfet,
Ho pedan da etrorn ha qenta ma elfet.

Me ya jous ur vech bete ti va mestrez,
Tenzor eos a sqient, rouanez a furnez ;
Hi eo sur va fringes, hac e deus amitie
Evit e zervicher dre goir sincerite.

Bonjour déc'h, va mestrez, rouanez ar merc'het,
Ho saludi a ran gant enor ha respet,
Dre ma zoc'h un objet herves va fanazi,
Ur rosen quer brillant hanvet ar fleur de lys.

Ha déc'h pareillament, den prodant ha den fur ;
Po quelan o toset, emeus calz plijadur.
Clévet emeus abaoue e voach un den savant,
Mes brémàn ho credan, p'o clévan o parlant.

Me garfe, va mestrez, nac e larfac'h din
Ha me a zo d'ho erad ive d'ho fantazi :
Ia, va zervicher, c'houi a garan parfet
Dreist gement den yaouanq a zo sur var ar bed.

Ma ouffen, va mestrez, e ve güic gementse,
E ven sur an objet demeos ho carante,
Me ho recompanse demeos a guémentse,
Hac e vemp unisset dre ar c'hraç a Zoue.

Eleaf, va servicher, mid a illit credi,
Me rafe va burz evit caout hoc'h hini ;
Credit, va servicher, ia, pa en toc'h.
Pa gaffen mab ur priog, bigen déc'h na vanqan.

Va speret so troublet pa sonjān, va mestrez,
Hac a ra din credi e z'oc'h godisserez ;
Mes na gretzen bigen e vec'h capabl da ze,
Er fèçon ma lerit ema hoc'h amitie.

Mes donet a rāo c'hois da laqat va speret
Herves va fantazi da garet un objet
Pehini marteze a rāj dio mil hirvoed ;
Va bue, va maro a zo en he galloud.

Bet persuadet mat eo güir a lavarān ;
Guell ve ganen mervel eguet ho trahissa :
Mat ec'h allit beza en assuranç a ze :
Me varfe evidoc'h, bzc em be mil bue.

Pa zellān eus an eol o commanç izellāt,
Éru eo an amzer ma zé poent din quittat :
Na meus qenz da netra nemet n'allān lezel
Va c'halou evit test eus va amitie fidel.

Eus a greis va c'halon, den yaouanq, me ho ped
Da retorn adare ba qentia ma elset ;
Hir e cav'n amzer hep clévet ho toare,
Qen a gavln vezò en ur moment un dé.

Me ya c'hoos eur veach da di va c'harante,
Evit clévet ganti eur vech c'hoas be doare.
Dre m'e deus ranfermet va c'halon er prison,
Dre e zellou charmant hac e c'homzou mignon.

Bonjour déc'h, va mestres, rouanez va c'halon ;
Oll studi va slient, va c'bonsolation :
C'houi eo a dra certen muia tra a garān
A guement zo crout gant Doue er bed-man

Me rent déc'h ar zalud ive, va servicher :
Abaoue meus ho quelet, e zeus calz a amzer ;
Dislaret a rān crenn ar pez ameus laret,
Dre ur conclusion à zo deut em speret,

Va speret ha ya c'horf zo en em gonsultet,
Hac en defin va zonch emeus bet remerget
Penos ne voan qet grēt evit an demezi,
Hac abalamour déc'h emeus cals a anni.

Qemerit, va mestres, ul lanc pe ur c'heze
Da dreuzi va c'halon, daouest peguer lem ve,
Ha ne lerit quet din ur gomz evel honnes
Goude ho peza laqet em c'halon rouanes.

Mes c'houi oc'h eus slient ha calz a brodanc,
Hac a ello poersa en ur plaq all bo chanç ;
Bet persuadet mat ma vizen destinet
Da gavet servicher, em bize ho choaset.

Honnez ar bromessa ho poa ta din-me grēt
Diveza mam boa bet an enor d'ho quelet ?
An én bac an douar zo test ar güir Doue,
Me bo lez da jugi demeus ar virione.

Evel un ouades a ve'creis ar mor bras,
On beuzet em dælou, o compren em disc'braq,
O velet an dessign demeus va staneden,
Chanchet demeus a roz ebars en ur spernen.

Qent eguet finissa, emeus c'hoant lavaret
Un daou pe un tri guer e profit ar voaset,
Dre ma meus canjolet ebars e pep quarter,
Se ra din lavaret an dra se a zo sclér

M'ho ped, potret youanq, pere a rēo er bed,
N'a fiet birviquen e proposiou merc'het :
Ar bromessau caer a nich evel ar pell,
Pa sonjer nebeuta a ya gant an avel.

Guelet a rit amàn dre bez seurt promesse
On me bet decevet gant ar femelen-se :
Coulz ha me, tud yaouanq, c'houi ell bezə trompet,
E qeit me zoc'h abret, me ho ped, diouälet,

N'en em fiet qet var ar ho tiscadurez,
Balamour m'oc'h dea brao quenebeut var ho furnez,
Me am boa deus-an ell ha demeus eguile,
Ilac a zo bet tromplet o re'flout enne.

Dre ma voan yoauanq, alles ! na ouien qet
Ar fègon da zisput eus or godisserez :
Gant o zellou charmant hac o c'homzou qen douç,
E laqont ur galon da veza amourous.

Rac se, potret yaouanq, tenlit evez oute,
Me ho ped da gredi gant pep sort güirione,
Ur plac'h, mar dē pen scâu, à rayo ho malheur,
Mes, mar dē coant ha fur, e rayo ho poneor.

FIN.

